

## Kartenn-identelezh Kemper

Mise à jour le : 08.01.2016 | 09h08



**Prefeti Penn-ar-Bed ha kêr-benn Bro-Gerne eo Kemper, ha skediñ a ra kalz muioc'h eget ar pezh a vije gortozet digant ur gêr grenn (63.929 a annezidi).**

Pe e vefe Bro-Gerne istorel pe Bro-Gerne armerzhel, dibar eo an dachennad vras-se e su Penn-ar-Bed, en-dro da aber an Oded, dre he startijenn hag hec'h intrudu.

Sevenadur, buhez ar c'hevredigezhioù, dudi, endro... Ur pol obererezhioù dedennus eo Kemper. War-hed 15 km diouzh aod ar meurvor Atlantel, a-dal da Amerika, Kemper zo ur gêr digor da vat war ar bed.

Rannvro : Breizh  
Departamant : Penn-ar-Bed  
Statud melestradurel : prefeti  
Bro : Bro-Gerne  
Etrekumunelezh : Kemper Kumuniezh  
Kod kumun : 29232  
Kod-post : 29000  
Maer bremañ (abaoe 2014) : Ludovic Jolivet

Anv brezhonek : Kemper  
Bro istorel : Bro-Gerne  
Bro hengounel : Bro-C'hlazik  
Ger-stur : «unanet e vimp kreñv»

Poblañs hollek : 63929 (2008)  
Stankted ar poblañs : 761 annezad/km<sup>2</sup> (2008)  
Anv an annezidi : Kemperad(ez) / Kemperiz

Gorread : 84 km<sup>2</sup>  
Niver a eurvezhioù heol/bloaz : 1634  
Niver a zevezhioù glav : 154  
Gwrezverk izek keitat : 8,1°C  
Gwrezverk uc'hek keitat : 15°C

Ti-kêr Kemper

44, plasen Sant-Kaourintin  
29000 Kemper  
Tél. + 33 (0)2 98 98 89 89  
Email : [contact@quimper.bzh](mailto:contact@quimper.bzh)

